

# AR WIRIONEZ

Dédiée à M. Charles Nouël de Lesquerne

4<sup>me</sup> ÉDITION

Chilaouet ma ali, paour ha pinvidik:  
Ar votadek, pet sonj, ne-ket eur c'hoariel  
Dar c'houlz-se e weler a Gaou e rodeel  
Gand eur iale'h enn he zorn, digaset gant Lutik (1) !

Da dapout vit he voaz eunn toulladik mouezio  
E sklabe arc'hant braz enn hostelerio....  
Evel ar marmouzien n'en deuz netra da goll  
Henvel euz eur c'hi klanv, redek a ra dre hol.

Evel eur marc'h kiger a red hirie gant Job,  
E taoulampo warc'hoaz gand Fanch evit he c'hob:  
Eunn tol fallagriez enn han lak kalz a stad;  
War ar jalod brein ze, beugeuset, ma zud vad.

(1) An diaoul evehek.

Al lezen, o pet sonj, e deuz eun nerz spontuz,  
Ret eo plegan crak dirag-hi ha fonnuz;  
Pa ve impliet mad ann dud en em gav iac'h,  
Pa ve impliet fall, homp holl tapet er sac'h.

Vid ober lezenno, ha lezenno gret mad  
Dibabomb enn hon touez unan a furnez vraz;  
Na re goz na re iaouank, enn eur gir kreiz he-n-hoad  
Rag ann den ne dal man pa ve erru re graz,

Pa c'het d'eur foar benag mar eo vit gwerza  
Ec'h et diwar ann dour pe gant saout pe gant moc'h  
Ha mar bec'h meo ha dall vit ober ho prena  
E kemerfet abred eur wiz evid eun oc'h.

Dirag ann dud a blu, alaouret penn-da-benn  
Evel dirag ar re eo touz ho chupen:  
Askol fal a zivoan e ker vel war ar mez,  
Diwallet, ma zud vad, diwallet, tudo kez.

Unan anaveann, fløeryus vel ann nalez;  
Hen-nez, o ped sonj mad, a chom enn eur palez;  
Fripon touet, gaouiad, e-tu-hont eo laer  
Kap da rei e ine evit triouac'h diner.

He dend a zo du-glaou : debred gand ar c'hlenvet;  
He deod hag<sup>h</sup>he fri brein ho deuz c'heouz ar pec'hed ;  
Bez en deuz arc'hant braz ! a vern ! a vern ! a vern !  
Laeret diwar hon c'houst, evel ier gant ar lern!....

Diwar benn ar plaso, chekon ! gwasas chas bleo !  
Nem dorna a reont ken a ziwad ho c'hreo  
Spontuz e ho gwelet a blad, a bign, a grap  
Evel c'has war eur c'had toled enn holligrap.

N'ho deuz ket a amzer evid dibab ho hend  
Toïezo ! ze ne mad nemed vit ar zodien !....  
Pad ma vezo ho dorn enn eur ialc'h leun a aour  
E-sonj gant-he dre loc'h n'afont biken da baour.

Er bed-man, ho ped sonj, neuz nemed diou lezen  
• Ar peoc'h a vo gan-ec'h mar d'oc'h enn hini vad :  
Ha kaer ho po gwinkal, n'em stourman nem asten  
Na lempfet gwec'h e-bed ann nerz a zorn ann tad.

E touez ar francizien, siouaz ! e zo tud dall  
A gerz gand plijadur enn hend ar zio fall ;  
Distroomp euz Doue, pedomp, breudeur pedomp  
Fit pellaad rak-tal ar walen zo war n'omp.

Ho ! Rouantelez Franz ! ho ! ma bro binniget !  
Gwad holl ha kastiet, lic'hiet ha blonset ;  
Petra ta teuz te gred vid bezan er stad-ze ?  
Skuill daëlo, ma Mamm gez hag holl pedomp Doue!....

### ADRIEN RAISON DU CLEUZIQU

*Kenta a miz c'huevrer, mil eiz-kant-unnek a tri-uguent.*

---

Sant-Briec moulererez L. Prud'homme.